



HISTOR ADMIRABL

EUS A VUEZ

SANTEZ HELENA.

Var ton YAN GUERIN.

C. G. R. M.



BREMA e fel din disclêrya
Ar Vuez Santez Helena :
Bezit attantif d'e c'hlêvet,
Ho calon sur a vo touchet.

Clêvet a refot e buez
Carguet eus a dristidiguez,
Hac ar martir e deveus bet,
Hac a zo ganti c'hoarvezet.

Me lavaro d'êc'h pen-da-ben
E voa hi caera femelen
A guement a vije cavet,
Gant ar bed oïl voa-enoret.

Beza voa vrasa qalité,
Pa voa hi merc'h da eur Roue;
Rac merc'h voa da roue Anton,
E Constantinopl voa e drôn.

Pa voa Pab e Rom Sant Clement,
Ennes a voa eus e c'herent,
E voe bars er bed-mâ ganet
Er blaves pêvar c'hant ha dec.

Goude an Incarnation
A Jesus, hon Roue güirion,
Er guær eus a Constantinopl,
Hac estimet bras gant ar bobl.

Pa voe en oad a bemzec vloas,
He mam diganti a varvas,
Ma fellas d'e zad e c'havet
Evit ma vije e bried.

Mont a eure da gaout ar Pab,
Hac en esper cavet e c'hrat,
Evit caout e gonsantamant
Da zemezi d'e verc'h yaouanq.

Ar Pab neuze pa er c'hlêvas,
A respont gant un horror bras;
Pelêc'h m'ar C'bristen var ar bed
A guemerfe' verc'h da bried?

Gant an Ilis eo difennet,
Ha gant Doue eo ordrenet
Na vezo james eurenjet
Un tad de verc'h james nepret.

E ve demeet ur verc'h d'e zad,
Ennes zo ur c'hrim execrapl;
Ur c'hrim a enep al lezen,
Siouas, e touez ar Gristenienn.

P'e devoe clêvet Helena
Ec'h arruje sur quement-mâ,
Var ar môr en em ambarças,
Hac e Flandres en em rentas.

Eno pa voe hi arruet,
En un eclus en em rentet,
Pa voe tost da un abati,
E commenças son ar c'hlec'hi.

Neuze an oll leanezet
A voe qerqent bras estonet
O clêvet ar c'hleyer o son,
Hac int mont oll en orêzon.

Hac int mont a sellet neuze
Piou a voa êru er c'hontre,
Ma remerqjont or femelen
A zeue d'ho c'haout pen-da-ben.

Mont a rejont e procession,
Gant respet ha devotion,
Evit monet d'e rancontri,
Gant ur joa vras d'e saludi.

Ha pa velas hi aneze,
E voe estonet bras ive,
Hac oc'h o guelet a vanden
O tont d'he rancontr evellen.

Neuze recevjont anezi,
Ha conduet d'an abati;
Rac guelet a rent oll certen
E care an Antrou souveren.

Mes na chomas qet pell gante,
E chenchas timat a gontre
Dirac ar roue Catebron
Un den cruel ha dirêzon.

Mont a eure var bord ar môr
Evit savetei e enor,
Hac e pedas Merdaïdi,
Mar plich ganeoc'h va embarqi.

Un dra derrubl a erruas
Pa voant e creiz ar môr glas,
Rac an dud oll a voa lazet
Gant ar c'horserrien arraget.

Exceptet Santez Helena,
A voa ur femelen ar gaëra;
O sônjal cavet e guere'hdet,
E voa hi ganto rezervet.

En orêson en em laqas,
Da Jesus en em recommandas :
M'ho ped, va Jesus, va Roue,
Conservit va virginite.

Pa voa achuet e feden
D'hor Zalver Jesus evellen
Un tân eus an eê a goesas,
Al lestr hac an dud a losqas.

Hi voe preservet gouscoude
Gant ur planqen, dre c'hraç Doue,
Ec'h erruas e rivier Sign,
E quichennic bord ur jardin.

Ar rivier' ye bete Londres,
Hac eno e voa ur verjes,
Hac ur feunteun gaër a gavas,
En e c'hichen e tisquizas.

Ar roue Herri e guelas,
Bars en un dristidiguez vras,
Azeet etal ar feunteun,
Ila ne voa den en e c'hichen.

Tostât a ras neuze outi,
Hac e c'houlennas diganti :
Livirit din presantamant
A belec'h oc'h, merc'hiq yaouanq.

Me zo eus a Constantinopl,
A guerent pinvidic ha nobl,
Hac a zo amâ achappet
A dre daouarn ar barbaret.

Ah! va c'halon a fazi din,
Rac naon a meus, ne allàn mui;
Pell bras zo n'emens débret tam
Ha va c'halon em c'hreiz a rann.

Ar roue Herri pê c'hlêvas,
D'e Aumonier a gommandas
Monet pront da goerc'hat dezi
Peadra evit e soulaji.

Neuze en e c'hassas gantâ
Ebars en dy da loja,
Hac o tont d'e recommandi
Evel unan a dud an ty.

Goude se e voent demezet,
Souden e voe grêt an euret,
Hac ar fest a badas gante
Betec an nombr a ugent de.

Daou vlaves antier ez int bet
En o flijadur assuret,
Qen en em gavas douguerez,
Neuze e devoe goal vuez.

Digant e mam-gaer, ar Zantez
E devoe calz a baourentez;
Herves ma rapport an histoar,
E devoa calz eus a c'hlac'har.

Ar roue Herri a yas timat
Da gaout an tad santel ar Pab.
Evel m'en doa recommandet
D'ar gombat ouz ar Sarazinet.

Lezel a eure en secret
Tri verq er guær eus e gachet:
Rêi ras unan da Helena,
Un all da Vari Clocestra.

An drede neuze a roas
D'ar c'hont a voa e vignon bras,
Da bini e recommandas
E briet gant affection vras.

Glac'har vras a voe er pales,
O lavaret adieu assambles,
Hac epæd eiz vloas varnugent
N'en em velint sur e nep hent.

Helena e devoa ganet
Daou vuguel a voa caer meurbet
He mam-gaer a roas da gredi
Penos e devoa bet daou guy.

Ar roue Herri pa glêvas,
A voe certen estonet bras,
O clêvet e devoa ganet
Daou guy evelse e briet.

Neuze e voe hi condaonet
Da gaout e brec'h deo troc'het,
Hac amaret e bugale
Unan dezi a hep coste.

Ambarqet voe var ar môr bras,
Ebars e Breiz e tisqennas.
Al lestr en devoa e digasset
Da Londres a zo retornet.

Cri vije'r galon na voelje,
Oc'h e guelet nep a vije,
O rêi da zena d'he bugale,
Hac hi prest da vervel digante.

Da gousqet pa en em laqas,
Daou leon eus ar c'hoat a zeuas.
Hac a gassas an daou vuguel,
Qement-mâ certen voa cruel!

Un Ermit a voa neuze'r c'boat,
Ha diouz ar c'hri a zeuas timat;
Hac a gavas an daou vuguel
Etre griflou daou leon cruel.

Unan anê Bric a hanvas,
Eguile Martin a c'halvas;
O daou e voant gantàn maguet
Epad c'hoezec vloas assuret.

Ebars epad an amzer-mâ
E voe e Naonet Helena,
Hac un hostises a gavas,
Truez outi a guemeras.

Chom a eure da zervicha,
Ebars an ty voa'n disterra,
Dispriset voa gant pepini,
Laqet voa da dorcha listri.

Ober a rê gant dilijanç,
Hep na rebel na repugnanç,
Qement a ordrenet dezi,
En o rê oll hep contraigoi.

Guelit amâ greg ur Roue
Carguet demeus a baourente,
Rentet qen humbl ha qen izel
Dirac ar bed universel.

Sellit bremà'n humilite,
Hounez a blich bras da Zoue,
Rac an humbl a zo exaltet,
Hac ar superb zo discarat.

Ar roue Herri distro a Rom,
Ha gantâ ar Roue Anton,
A erruas en e bales
Ebars ar guær eus a Londres.

Allas! eno pa êruas,
Ar c'hont Clocester a gavas,
Ha goulen neuze digantâ
Peleac'h voa eat Helena.

Nao messenger voa digasset
Dirac ar Roue da lavaret
O doa digasset pep a lizer
D'ar C'hont Clocester a dra se.

Mes un all a zeuas goude,
A lavar as ar virione,
Penos e voa bet trahisset
Gant ar Rouanez côz assuret.

Ar Rouanez côz zo condaouet
Da veza en beo losqet,
Abalamour ma e devoa
Laqet trec'hi brec'h Helena.

Me lavare deoc'h ar recit
An daou vuguel hac an Ermit,
Ha penos voe an disparti
Ebars er c'hoat gant calz a gri.

An Ermit var bord ar rivyer
A yeas gant an daou vuguel :
Amàn, emezàn, o qivis,
Ganén d'am zy ho tigassis.

An daou vuguel a respontas
D'an Ermit outi pa gomzas :
N'en dê qet c'houi-ta, Ermit mat,
Eo a zo a dra sur hon tad?

An Ermit neuze a lavaras
Deze gant tristidiguez vras :
Allas ! m'ho cavas amàn lezet
Etre bleizi ha loenet.

Ha gant truez m'ho tigassas
Ho taou ganén d'am ermitach,
Hac e meus ivez ho maguet,
Hoc'h elevet hac instruet.

An daou vuguel a lavare
An eil d'eguile aneze :
Pa n'en dê an Ermit hon tad,
Deomp-ni brêmâ da glasq hor mad.

An Ermit a voe trist meurbet,
Pa o c'hlevas o lavaret
E zajent, allas! da glasq o mad,
Pa ne voa qet én voa o zad.

Pa voant o tiscours evelse,
Erruont Merdaïdi ene :
Brêmâ ez eus c'hozec vloa
E legezomp amâ Helena.

Gant anqen vras digonsolet
D'e daou vuguel e doa collet,
Ne devoa brec'h nemet unan
Da zicour daou vuguel bian.

Neuze e lavaras Martin,
Bric, va breur, deomp bete'r fin,
Elec'h ma plijo gant Doue hor c'hass,
Ma cavimp hor mam ur vech c'hoas.

Merdaïdi, ni ho suppli,
Plijet gueneoc'h hon ambarqi,
Ma zaimp en hano Doue
Da glasq hor brô hac hor c'hontre.

Ar Merdaïdi a respontas
D'an daou vuguel pa o c'hlevas :
Deut en hon lestr hac ambarqet,
Ni ho laqai en douar assuret.

En Allamagn ec'h arrujont,
Hac arc'hant dezo a rojont;
Ouspen e rojont da leina
D'an daou vuguel gant calz a joa.

En Bavier pa voant arru,
E zeont o daou a ru da ru,
Ma o guelas ar Rouanes
Ebars er ru eus e fales.

Ma commandas d'e messenger
Mont da guerc'hat an daou vuguel,
Rac qer caër oant evel an de,
Clorianda o admire.

Digasset oant neuze dirazi,
Roet e voe deze da zibri :
Neuze evel tud affamet
Ne squizent o têbri o boed.

Re hir ven ma conten antier
Ar brezel voa er brô Bavier;
Mes beza voant victorius
An daou vuguel, dre c'braç Jesus.

Martin a voa un den vaillant,
Hac ebars er gombat sanglant
Laza a ras calz a Sarazinet,
Ha calz eus an Turqianet.

An Itron Varia Boloigne
O sicouras sur an deiz-se,
Hac evit caout ar victoar
Dre c'hraç Jesus var an douar.

Da Tour e teujont ac'hane,
Ur guër a zo en Tourenne,
Sant-Martin a voa aumonier
Da rêi soulach d'ar beorien qer.

O mam ivez a erruas
En Tour gant ur baourente vras,
Pa voa Martin o tistribui
An aluzen da bep hini.

Goulen a eure diouti,
Pa deuas da zellet outi,
Pe a lec'h oc'h-hu deut amâ?
C'houi n'en d'oc'h qet eus ar vro-mâ.

Commanç a ras nenze e galon
Da zonet d'e biqat qen don,
Neuze et teuas sonch dezâ
Ebars en e vam Helena.

Diaguent en devoa clêvet,
Evel ma hon eus rapportet,
E voa troc'het ur vrec'h dezi,
Hac én dont da zònjâl enni.

Neuze en em anavejont,
Gant joa vras en em zaludjont :
Autrou Jesus, eme Helena,
Va bugale guès a velàn.

Ne zeziren qet qet marvel,
Nemet guelet va daou vuguel :
Autrou Jesus, Roue an Trôn,
Homâ zo consolation
Da eur vam e devoa collet,
He daou buguel e deus cavet.

Adieu, emezi, va bugale,
Mont a ràn brêmàn en han' Doue,
Ho pet ac'hanòn sonch ha memoar,
Va bugale guer, var an douar.

M'em bezo sonch ac'hanoc'h ive
Pa vin e rouantelez an eê,
Evit ma vezimp oll assambles
Er Barados gant an Æles.

FIN.

E Montroulez, eus a Imprimeri LÉDAN.

GUERC'HEZ SANTEL,



PEDIT EVIDOMP.

